

AR D'VOR

Koumanant-bloaz : 50 lur -
SKRIVERERZ HA MEREZERZ
G. BERTHOU, 72, Str. Oberthur,
Roazhon (K.R.P. 482-68, Roazhon)

KAZETENN SIZHUNIEK

N'ANKOUNAC'HAIT KET HAS
C'HWEC'H REALAD timbrout pep
gwech ma fell deoc'h kemmat
ha chomlec'h.

Pa gouezh al la-
bourer e-kreiz an
erv boulc'het a-
boan, d'ar re a
chom bev eo da
gregiñ en arar.

AMAN ROAZHON-BREIZH !..

EVIT KAOUT EO RET GOULENN

Bemdez e ro skingomz vrezhon
ROAZHON-BREIZH abadennoù war
288 metr-hidre... e-pad ur c'hard euri
Gwelloc'h so eget ar pezh hor boa
a-raok ar brezel evl just, peogwir
n'hor boa neuze skingomz ebet. Ben-
nezh Doue d'ar re a diomp se dezho.
Koulskoude, bremañ ma lavarer dre-
holl ez eo ret digreuzenni, e vije bet
mat marteze peurechuiñ digreuzenni-
digreuz ar skingomz.

Lizheroù a reevomp e-leizh digant
setaouerien ha perc'henned ardira-
kou skingomz. An holl anezho a lavar
o nijadur da zegemer abadennoù skin-
gomz e brezhoneg ha diwar-benn
Breizh, pe da c'houzout ez eus seurt
abadennoù. Ar biladur-se n'eo ket
digemmes koulz de.

Petra a vez reb et da ROAZHON-
BREIZH gant an ?

NE VEZ KET KLEVET AN ABA-
DENNOU pe klevet fall e vezont en
tu all da zepartamant li-ha-Gwilen.

AN EURIOU N'INT KET AES. Da
7 eur goude lenn, an dud a labour
n'int ket distroet d'ar gêr peur-
liesañ. Ouzhpenn-se 7 eur diouzh
an eur neuze ne ra nemet 5 eur
diouzh an eur goz, ha da 5 eur
goude kreistez, n'emañ ket ar
gouerien er gêr kennebeut.

RE VERR EO. Keñveriañ a reer an
abadennoù 15 munut evit ar Vre-
zhoned gant re ar postoù all (Pa-
riz, Toulouse, Marselha, Lill, h. a...)
a ya en-dro e-pad an dez. Soñjal
a reer : « Amañ ivez e vez graet
goap eus ar Vrezhoneg. »

N'EUS KET A-WALOH A ABADEN-
NOU. Evit al labourerien douar
vrezhon, un abadennoù 15 munut
bezh ; evit an dud a vor, ar bes-
keterien vrezhon, 15 munut... bep
eil sizhun, pe bep trede. Memes
tra evit ar peurest...

KALZ A DRAOU A RA DIOUER.
Biskoazh ne gomzer ouzh ar re-
puidi vrezhon na kemmbrout ouzh
ar Vrezhoneg en hariz. D'ar sa-
dorn (gouestlet d'ar vrezhoneg-
erion) o vez graet ur gontel vrez-
honek evit ar c'hallegerien ; evit
ar vrezhonegerien avat, kotel-
welikat ebet. N'eo nemet dre ze-
gouzout e vez komzet eus istor pe
zouronniezh hor bro ; mennozi ar
Vrezhoneg war bep tra ne vez ket
graet meneg anezho token.

TAMM KELOU EBET E ROAZHON-
BREIZH. Tamm diskleriadur ebet
biskoazh war al lezennou neuze,
war ar Raviatlamant, war an
traoù omp sañset gouzout, ni pe-
zanted, micherourion, artizaned,
perc'henned pe besketerien pe all.
Koulskoude, diouer a zo a ziskle-
riadurioù pa 'z omp sañset gouzout
ur bern lezennou ha reolennoù a
bep seurt, luziet kenañ, ha dreist-
holl bremañ pa ne vez ket kavet a
gazelennou ken.

An holl draoù-se a lak hor c'hen-
skriverien da grediñ e kemerer ar
Vrezhoneg, e-keñver ar skingomz ivez,
evit SELAOUERIEU A NETRA ha re
zister evit ma vefe pletet gant o
ezhommoù hag o c'hoantou.

Ret eo dimp lavarout d'hor c'hen-
vreiz ez eus traoù, stag ouzh an
ardivinkoù pe ouzh an darvoudoù,
hag a harz seveniñ o holl c'hoantou.
Kaiz a draoù a c'hallfe bezañ gwe-
ltaol, avat ; ret eo d'ar Vrezhoneg
lavarout hag adlavarout diehan ar
pezh a fell dezho.

EVEL SELAOUERIEU E TLEOMP
KLEME. Talvou a hanomp evit han
ardivinkoù radio, ar gwir hon eus
neuze kaout abadennoù hervez hon
ezhommoù hag hor c'hoant.

(Kendalc'h paj. 2)

Selaouit'ta !

Embannet eo bet gant Ti
« Skridoù-Breizh », eus Brest ro-
mant fentus Jakez Rion, « An Ti
Sabanez ». Labour e-bour-chin d'al
lennerien gant Lou ha Job, an doue
« Istrogeñ » ! Stabennek eo bet al
leir eus ar c'hentañ gant an arour
brestat, Per Peron.

« E Ti » « Skridoù-Breizh » gant,
e kavomp « Kontadennoù a Vro-
Skos », lakael e brezhoneg gant
Roparz Hemon, ha skudennet
pilh hag en un doure pilfus merr-
bet gant Jaël G. Philippon.

« E Ti » « Skridoù-Breizh »,
adarre... ha gwel-a-se ! — Ur
kentañ ar « C'hoarba brezhonek »
gant « Pemp Pech-C'hoari Ber »
dibab etit o ziboudigezh hag
oes da zispiegañ. Setu ar roll anez-
ho : « An Dio Zremm » gant Lan-
gleiz ; « E-lor ar Pella » gant Y. V.
Perrot ; « An Dakenn Dour » gant
Jarl Priel ; « Fortus, an Dokar
Daonn » gant Roparz Hemon ;
« Torjed ar Frer Juniper » gant
H. Gheon (troet gant Jakez Rion).

Deut eo er-neuz eus gwisk
« Ti-Moultrezh Kreiz-Kar ». Ro-
azhon, an danevell gwer arabiet
« Sindbad ar Marholod », lakael e
brezhoneg gant Roparz Hemon, ha
skudennet gant Z. Haus.

(Kendalc'h ar baj. 2)

Frañsez DEBAUVAIS

Frañsez Debauvais a zo aet da
anaon, an 21 a viz meurzh 1944,
en ur c'hlañvidi, e-kichen Kolmar,

1903, n'oa oadet eta nemet a
41 bloaz.

Re vras eo bet ivezon, e-pad
ugent bloaz, re daer eo bet la-
bour unan eus penañ ha gre-
dusañ pastred a-raok ar gae-
tann « Breiz Atao » hag ar men-
nadoù politikel anavezet gindan
an anv-se, evit ma ne vo ket
barzet disheñvel, gant ar Vre-
ned o-unan, ar Breizhad a zo o
nevez-tremen.



Frañsez DEBAUVAIS

en Alzas, lec'h e oa aet da glask
ar pare d'e skevet. Ganet e
Roazhon, an 31 a viz genvar

Diwezhatoc'h, pa vo habaskaet
ar speredoù, pa ouezint gwel-
loc'h an doareoù, ha pa vo di-
douellet an dud a youl-va, —
rak n'eus netra d'ober gant ar
re all ! — e vo laketa ar gwir
gantañ, e vo anavezet o uestias
e vuhez, e wastas e yec'hed, e
kollas e vrud — e seil un darn
eus e genvroiz — evit silvi-
digezh ene Breizh, frankizhoù
Breizh, evit ma vev Breizhiz ur
vuhez klokoc'h, yec'hoc'h, led-
noc'h, dindan lagad an heol.

Evit ar pred, goulenne re e
vefe. Na petra 'ta ! Bezañ al-
gomprenet, daoust ha n'eo ket
planedenn an dud uhel ?

Darbarer apotiker e oa o dad,
marc'hadouruz dantelezh e vamm.
Gallet en dije, evel ket lies a
Vretoned, kas da vat e studioù,
bezañ kenwerzhour, pe den-
e-keñver, pe bolitiker diouzh moal
Paris. Pividiak en dije gallet
ober, ha bevañ eurus, dianav,
gant e aertiv da greistoiz hag
a-raok koan. Tamall ebet, na re-
buc'h na vije bet graet dezhañ.
Er c'hontrol.

Er c'hontrol, avat, dibabet en
doe an hent strizh ha poanuz,
a gaver er penn anezhañ, ar
peurliesañ, an dismegasañ hag ar
verzhertint. Galvet e oa evit
heñval leziregezh e genvroiz, ha
sentet en doe ouz e c'halv. Merv
eo, diskaret diwar re labourat.
Doue da reiñ dezhañ peoc'h E
Varodoz, ha d'e genvroiz da
stouñ war e vez gant doujañ !
Rak un dra ne vo ket nac'het
outañ gant an holl : un den eus
e oa, ken e oa. Va zentañ a
c'hellan reiñ, rak mignoned e
camp abaoe tremen 25 bloaz.

Ne lavarin ket na veze morse
ganeomp kaoz politiker. Ar
pezh a zo sur, avat, peadra har
bo usañ teod hon daou war un
danvez fonnus, ha ne daomp
morse skuizh gantañ : ar bre-
zhoneg.

(Kendalc'h paj. 2)

FURNEZ AR GEIZH HAG AR MICHEROUR

Milinerien, kemenerien marichaled, h. a...

Aon em eus e vefec'h aet skuih,
micherourien hag artizaned Breizh-
Izel, o lenn bep an amzer war

Arour presgennad brezhoneg Kar-
deur ar Micherou skignet gant
Roazhon-Breizh Abalamour da be-
tra ? amezoc'h. — Mel... o vesañ
ma n'eus anezho peurliesañ nemet
divizion sirius, diwar-benn al le-
zennou, an deskadurezh-riker, hag
all. Kemet ha ken bihan ma'm
eus lakael em soñj komz deoc'h
hiziv eus... furnez ar geizh.

« Ola, Jakou », eme Vaivon
gozh ar gannerez, en ur laketa ur
friad butun ('vez ket ken bemdez,
hañ, Maivon ?), « Sed amañ unan
'vat, hag a zo 'vont da gas ar ha-
nomp pell diouzh kaoz an artiza-
ned, ar wech-mañ ! Furnez ar
geiz ! furnez ar geiz ! petare pre-
zegen an diaoul e vo klevet ga-
nimp bremaonn ? »

« Gortoz ! gortoz ! moeneb
Malvon, n'hen goar, Meneñ hir ha
prezegen verr a blij d'an dud
dibredet ; ne vin ket pell eta ! Ha
pa vo echu gania, e c'helloc'h
bezañ laouen... » vel ar c'harrer ?
(Kendalc'h paj. 3)

Enez Iwerzhon hag ar brezel

Peson arne a zo adarre war Enz
ar Senl, an Enegeñn C'hlas, Iwer-
zhon, bro bet ken reuzidik ken-
diver ar Vretoned. Ha dezhi bezañ
pell diouzh taehennou ar brezel, —
bogen piv a zo pell, pa soñjer
evit ? — klask a raer hec'h em-
lout en labour, er c'habaduilh a ra
e reuz war ar bed.

Gouzout a reer an doareoù. Stad
Dieub Elre, hejet ganti, ugent bloaz
zo, mestroni ar Saozon goude ur
brezel taer ha strivoù pennek ha
disehan, a zo bet skoumel ganti
darempredoù gant an holl gouar-
namantol all. Bez' o deus ar re-mañ
eta kennad ha konsuled e Dulenn
(Duhlin) hag e kêrioù bras ar Stad
Dieub.

Abergiñ o deus graet Pennou-Bras
Washington ha Londrez e oa eus
tieg-konsuled an Alamagn hag ar
Japan gwir neizi spierien o steuñ
labour enep ar Saozon hag an
Amerikaned. Goulnet o deus
groñs ma vije sarret an tiez-se ha
kasel kuit ar ginnaded.

Nac'het he deus Iwerzhon ple-
gañ d'ar seurt urzh. Embannet he
deus, dre c'henon an Ao de Valera,
he Ministr bras, eho he mestrez
nemeti, ha ne felle ket dezhi sevel
a-dur pe a-enep an eil re hag ar
re all eus ar broioù e brezel, ha
ne c'houlenne nemet peoc'h.

Un digarez eo bet ar respont-se
d'ar Saozon, — ar vac'homerien a-
nevez ar Saozon, — da glask gwask
a-veze ar Stad Dieub, en ur dro-
c'hañ he holl zarempredoù ouzh
ar bed. Savet eo, avat, holl holl
Iwerzhon, a-du gant an Ao de Va-
lera, gouerien koulz ha tud kêr,
socialisted al « Labour Party »,
koulz hag an eskibion, ha, pezh a
zo penezoc'h, enebourien politi-
kel ar Ministr o-unan.

Ma ne vije bet en abadenno nemet
ar Saozon, ne vije ket bet diaer
e gontenn da zireustañ, forñ
peñn galloudus eo ar re-mañ.

Tognet e vijent bet ur wech ouz-
penn. O ger, avat, o deus lavaret
ivez an Amerikaned. Ha petra ' oa,
betek-heñ, an Amerikaned, nemet



An Ao. Eamon de VALERA

kalonekañ, pividiak hag efeed-
usañ skouzellerien Iwerzhon en he
stourm ouzh bro-Saoz ? Dre vilio-
niñ o kontel Iwerzhoniz er Sta-
dou-Unaet, ha rei e vije gouzout
hag-eñ emañ ar re-se a-du gant
an Ao. Roosevelt ha gant e venoz
dedennañ o bro c'henidik er bre-
zel.

Hogen da hiv a dalveze o asant
nemet d'ar Saozon ?..

Forñ penaos emañ Iwerzhon
gaezh etre dent un durkez.

Budet eo avat dre ar bed-holl
konegezh Iwerzhoniz, Souezh e
vefe e teufent da blegañ d'an Ame-
rikaned eken, daoust d'o migno-

niezh. Re denn eo bet dezho kaout
o frankiz, ha n'he foraniet ket evit
brasañ mat o enebour a-viskoazh,
ar Saoz. Gouzout a rainn he difenn
gant o armoù, mar bez rei, evl ma
rejoñt kel lies gwech en amzer dre-
menet.

Re a lorec'h eubizek a zo e kalon
Iwerzhoniz pelegañ da c'hour-
drouz pe da daol.

Lenn, war hor pevare pajenn, an
danevell, skrivet ganti hor c'hella-
bourer mat, Jord ar Mer, eus an em-
gannañ eallmann a rejont ouzh ar
Saozon, da geñver gantou Push
ar bloavezh 1916. E-touez an em-
gannerien-se en em gane Eamon de
Valera.

Kompennomp, neuze !

An Amzer o Tremen

+ E bro-Varma (Birmani) eo kro-
get armoedou ar Japan ha re an In-
diz dieub da arsañhañ an Indez. 'Tre-
net o deus an harzoù, goude m'o
devoe laczhet ar Saozon.

+ Hervez ur ministr saoz, e Ben-
gal, unan eus broioù an Indez, eo
marv, ar goañv-mañ, 688.000 den
gant an naon.

+ Kendere'het a ra ar c'hrogadoù
etre ar Russed hañ an Alamaned. E
lec'h pe lec'h e teu ar Russed a-
hanne da doullad lizennad o enebourien.
Tegel o deus Broskourv hag un
nedeñ kerioù all en Ukraina. Evit
man war-raok, ne gemeret dement
ebet gant o c'hollou.

+ Kull emañ penn-da-benn Saozon
hag Amerikaned, er menez Cassino en
despet d'o boulegadegoù, kandle-
goù hag arsañhoù gant soudarded ha
kirri-omgana.

+ Da heul un englev gant ar
Rejant Horthy, soudarded bro-Ala-
magn o deus kemeret bro-Ungaria
(Hongri) er 4 dalc'h.

BREZEL AR POST



Gwelloc'h, ne veze ket komzet g ardoù na kamembre, na komzet
a-chistred gant pennoù-bras ar gouarnamant evit al lizheroù skrivet
e shonlec'h warne e brezhoneg. Sell amañ unan, aaset ha dogouezet e-
1906 : ha pastel al lizheroù n'oa bet na dalioù na trolloù.

